

HENTADOÙ

KEMPER E GLAS

2 HENTAD-BALE



VILLES
& PAYS
D'ART &
D'HISTOIRE
DIRE



THRESHOLLE

2. STANKENN SANT-LAORAÑS



UN TAKAD GLASVEZ MAT EVIT DISKUIZHAÑ

E Stankenn Sant-Laorañs, c’hwec’h hektar glasvez dindani e-kreiz karter ar Bradenn, e kaver gweledvaoù a bep seurt. Enni ez eus 70 spesad disheñvel, en o zouez un toullad mat a haleg dreist-holl, ur werje vihan gant avalennoù-sistr hag un arboretom ma weler spesadoù gwez an deiziadur keltiek.

Gant Kevredad liorzhouriezh Kemper e vez kinniget stalioù ingal evit diskouez penaos tailhañ, imboudañ ha roteliñ er werje pedagogel a vez meret ganti e-barzh ar Stankenn. Ar ruskennoù a zo enni a zegas o lod evit gwareziñ ar vevliesseurterd el lec’h-se.

AR GWEZ-AVALOÙ

Ar gwez-avaloù eo ar gwez-frouezh a vez gounezet ar muiañ en Europa. War-dro 20 000 gouenn a bep seurt a gaver er bed.

Er Bibl e oa an aval ar frouezhenn difennet. Evit ar C’hresianed hag ar Romaned en Henamzer e oa arouez ar garantez. Ar bleunioù gwenn pe roz a zeu war wel e miz Ebrel ha strollet e vezont a-vokedoù peurliesañ.



Kuitañ al liorz dre ar straed Wallis-ha-Futuna. Er c’hroashent, kenderc’hel gant ar straed Enez Mayotte a-eeun gant ar straed Wallis-ha-Futuna. Troit a-gleiz e straed an Antilhez ha goude-se kit a-zehoù gant an hentig balizennet (balizennoù melen). 50 metr pelloc’h, treuzit ar straed Kaledonia-Nevez.

E kroashent an hentigoù, kemerit a-zehoù an alez Enez Pask da gentañ, ha diouzhtu goude-se a-gleiz, kemerit alez ar Bradenn. Kendalc’hit war-eeun en alez ar Bradenn.


100 metr pelloc’h e tro an hentig war an tu dehoù: kit gantañ ha tremenit dindan ar pont-hent. Kendalc’hit war-hed 150 metr. Kavout a reoc’h war ho torn kleiz porzh ur feurm (feurm ar Bradenn), kit warnañ da welet takad ar gwiniennoù ha liorzhoù boutin ar Bradenn.

3-KARTER AR BRADENN

AR GWINIEGI EN EM BLIJ WAR ROZ KEMPER.

Dre an hentoù don, a zo stank c'hoazh en tolead-se eus Kemper, e c'haller chom hep mont gant an hentoù ma tremen kirri. An hentoù-se, a zo gwez a bep tu dezho, zo roudoù eus an amzer dremenet pa oa ar Bradenn war ar maez. Er c'harter-annezañ-se, a zo e-kreiz kumun gozh an Erge-Vihan, ez eus bet kempennet un enezennig struzh gant ar c'hevredigezhioù, ul lec'h dic'hortoz evit ar bourmenerien nepell diouzh an hentoù bras.


E liorzhoù boutin Feurm ar Bradenn e c'hall an annezidi gounit o legumajoù war 2600 m² rannet etre un tregont logell-douar bennak. War roz ar Bradenn e ra Mignoned ar gwiniennoù war-dro ar skodoù-gwin hag ur winiadeg nevez a vez produet ganto bep bloaz.



1

AR WINNIEG

Ar gounid-gwiennoù zo unan eus ar gounidoù stankañ er bed. Evit produiñ gwin a-zoare ez eus ezhomm da blantañ ar gwiniennoù en ul lec'h ec'hon, heoliet a-walc'h, hag en un douar dizouret-mat. Ne vez ket graet gwin ar Bradenn evit gwerzhañ anezhañ, met dasparzhet e vez er c'helc'hoù kevredigezhel ha gwioniel, gant ur pal hepken : an tañva.

 *Kit war ho kiz evit adkavout alez ar Bradenn ha mont war-zu ar c'hreisteiz. Tremenet dindan ar pont-hent ha kendalc'hit gant an alez. E kroasht ar 4 hentig, kemerit a-zehoù (balizennoù melen). Goude bezañ lezet an tiez diwezhañ el lodennaoueg war ho torn gleiz, troit a-gleiz evit mont betek koad Kerradenneg. Heulhiit ar balizennoù melen dre goad Kerradenneg a gaso ac'hanoc'h izeloc'h da groasht-tro Toull Sabl.*